



**skrid,
23**

taolenn

23

Y.L. DEY

Ar Merc'hodenner p. 3

HERLE DENEZ

Dev p. 8

ROZENN AR C'HALVEZ

An Tren p. 29

JEAN COCTEAU

Ar Paour Kaezh
Martolod p. 34

PRIZ AN NIVERENN-MAN : 8 LUR

SKRID

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ LEZENN.

EIL TRIMIZIAD 1980

MOULET E ROAZHON.

TI-MOULEREZH PREVEZ.

MEROUR : PER DENEZ.

KOUMANANTIT DA SKRID

Koumanant evit 4 niverenn : 30 lur

Kas da : Per Denez
Ar Ri Ploare
29 100 DQUARNENEZ

CCP : P. DENIS - 1499-51 ROAZHON

KAS AR SKRIDOU D'AR MEMES CHOMLEC'H

Y.L. DEY

AR MERC'HODENNER

War-raok ez eas Gweltaz etrezek ar mor, gant e werennad dour pik-pik, hag ar blouzenn liesliv sanket enni. Bete-vremañ n'en doa biskoazh merzet c'hoazh na pegen flour hag habask e oa sonerezh ar gwag dispaket a-grenn gant barradoùigoù ingal ha klouar an aezhenn a gizelle pep drailhenn vor e-giz korzenn un orglez dour...

Ar paotr yaouank a reas un azez a-dal d'an dour glas-turkvaen, dres war ur mell bilienn gomphez hanterguzhet en traezh. Ma vije bet spiet gant unan bennak e vije tremenet Gweltaz evel un istrogell a-zoare. Edo e-unan-penn war traezh un ouf bihan distro, ha tamolodet e oa pe dost war e enezennig-vaen en ur zerc'hel gant e zorn dehou ur wialennig ezañs o vevezñ goustad. Serr e zaoulagad ha stouet e benn war e zivrec'h, Gweltaz a oa leuniet e gorf a-bezh gant lusk an dour ouzh ar c'herreg tro-war-dro, ha kren-digren e groc'hen gant fourradennoùigoù deuet eus ar c'heinvor...

Evit dezhañ bezañ tamolodet war e vaen, ne oa ket ken emzastumet-all spered Gweltaz ha se.

A-viskoazh e oa bet lavaret dezhañ e soñje re e re a draoù hag e teuje ar soñjoù da vezañ trec'h dezhañ, kenkoulz d'e gorf ha da yec'hed e spered.

Hag ar c'hrennbaotr a vousec'hoarzhe neuze en ur respont : "N'on nemet ur verc'hodenn en ho touez a fell dezhi troc'hañ ha strobellañ neudennou ha skampañ kuit ar buanañ ar gwellañ eus strobinnell he merc'hodenner, n'eo ket aes, c'hwi 'oar !"

Evel-just, den ne ouie hag hini ebet ne oa evit intent ar pezh a oa kuzh a-dreñv e zoare-komz, nemet ar paotr e-unan ! Plijout a rae dezhañ ar jeu, evit doare, petra bennak ma veze alies o c'houzañv dre forzh en em zrailhañ a-zivout kudennoù na oant ket e re a-wechoù zoken. Evel bep hini ec'h anavezaz e dechoù-fall hag e berzhioù-mat, hogen desket en doa tamm-ha-tamm mirout a varn ar pezh a oa dezhañ en donañ eus e greizon evel ma vez an darn vuiañ eus an dud oc'h ober a vunutenn da zeiz, a vloaz da vuhez : eleze, barn hervez "Ar Mañ hag an Droug" santel didor-rus, ar c'hilometradoù a soñjoù droch peuliesañ, fur a-wechoù hag a dreuz hor penn e-giz flapach ha safar ar c'hêrioù bras, barn skeudenoù distumm dizañvezel na c'hellont bezañ meizet nemet gant o ferc'henn...

Pell diouzh an deyrann-se e veze an heol o terc'hel gant e red mmlvloaziek, ha koshoc'h c'hoazh sur a-walc'h. Ne vefen ket gouest da lavarout deoc'h pegeit 'zo emañ "lagad goulou" an Drouized kozh, o troidellañ mod-se en un tu bennak en Hollved, na da geverata hirded e vuhez gant hini Mab-Den, ha koulskoude pezh a zo tu din diogelñ eo ne oa prederiet an drolinenn-hont digenvez war an draezhenn, na gant buhez an heol, na gant buhez Mab-Den, hogen gant ar vuhez hepken. Netra ken. Ar rak eus ar perak. Eeun ha didro...

Un tamm respont kentañ a voe roet dezhañ gant ... gant piv, gant petra, n'oufen ket hel lavarout, lakaomp, gant merc'hodenner an darvoudoù pemdeziek...

Ha setu, soñj en doa bremañ eus ar plac'h en doa karet kement, betek koll e skiant da vat. O terc'hel

oñj e oa eus he fennad-blev melen a vourre-efñ o spufañ pa oa o c'halonou tostik-tost an eil ouzh eben. Ar plac'h-se a oa an hini gentañ deuet da vezañ tik gant Gweltaz, hemañ her gouie ervat, ha lakaat klaoustre en doa graet war ar garantez-se, war ar pezh a hañvale dezhañ bezañ un dae divent-meurbet. Un dae gwirion, petra lavarout mod-all ? An tonkad an hini eo a oa bet lakaet gantañ daoulagad Gweltaz a-dal da re Velani, daou vloaz 'oa dija, pa oa bet goulennet gant an eil ur sigaretenn digant egile, pa oa bet eskemment sell an eil gant sigaretenn egile. Diwar neuze, n'oa ket chomet ar paotr war var, edo o paouez kavout unan bennak da garout. Hi he doa klas-ket tostaat outañ ivez, ha komz diwar-benn n'eus forzh petra, evel kement hini a zo deuet da soñj dezhañ n'eo nemet gant kloued ar gerioù e teuer a-benn da derriñ ar c'hlovedoù diwel a vez bepred ouzh hor gronnañ, hep gouzout dimp alies...

Krog e oa ur marevezh nevez a-benn ar fin, nevez a-grenn e-skoaz da monedonea ar rannvloazioù boas a dro e-barzh hor penn hervez kement tra a zegouezh ganimp a-hed an devezhioù. Fromoù, trivliadoù, aferioù karantez... Taget e oa Gweltaz gant ur c'hleñved na vez ket komzet diwar e benn gant ar vezeien. Ar plac'h-se he doa lakaet un dra bennak da ziwanañ e-kreiz kalon he muiañ-karet, ken e oa deuet da Weltaz un naon gwirion a oa diaes dezhañ gwalc'hif. Kement komz difoupet eus genoù Melani a zegase flouradennoù en e greiz, ha mall war ar paour-kaezh gouzout muioc'h ha muioc'h. Gouzout petra ? Teurel perzh buan a-walc'h he doa graet Melani he blev melen rodellek, e oa aet he levezon un tamm brav re bell war menozioù hag emzalc'h ar paotr, war e vuhez en he fezh zoken ; kerse 'oa ganti en ur soñjal ne vefe ken Gweltaz evit bevañ e-unan penn adarre, dizarempred, hepti, ha santout a rae fraezh e oa-hi deuet da vezañ gwir dae he mignon, hep gouzout dezhañ marteze, siwazh.

Hag an amzer ha mont e-biou... Eskemm ebet ken.
Pezh a oa diwanet a oa o weñviñ.

Bepred digenvez dindan an heol savet en e neinboent,
bepred ar werennad dour pik-pik en e gichen, kollet
ganti hogos he holl glogor, ha Gweltaz o chaokat en
e benn ar goulennou diwezhañ manet direspont pa oa
'n em gavet a-dal d'ur Melani daskemmet a-grenn, en
he c'hoazez war ur pallenn gloan gwenn, difiñv dindan
ur ouel 'lin gwenn-kann ivez.

Penaos disoñjal ar merc'her-se boutin ha drevezet
diwar batrom da gement merc'her a zo, an devezh-dis-
kuizh nemetañ (gant ar sul evel-just), a veze aotreet
da Velani gant merour al labouradeg?... Penaos diver-
kañ an eñvor eus he c'hambur beuzet gant houladennoù
soutil ha frondus gwial-ezañs sanket en un tammig
pri poazh fichet gant pailhourennoù marc'had-mat.
Sebatuet 'oa chomet Gweltaz e-pad pell, ~~raok~~ dezhañ
mont war-raok en he bete, tost-tost dezhi, ha gortoz...
Gortoz...

N'en doa ket soñj bezañ anavezet endeo ur seurt
endro, nemet marteze... Hag an dosennig wenn a-is
dezhañ ne seblante ket fiñval an disterañ. Setu,
stouñ a reas Gweltaz da gemer etre e vizied delt, ur
c'horn eus ar ouel sevel a reas anezhañ tamm-ha-tamm,
kent e leuskel gant ar souezh hag an dristidigezh
war un dro.

Ar mousc'hoarzh o paouez skedif war diweuz ar
plac'h he daoulagad serr, a oa dezhañ un dalvoudegezh
disheñvel eus an hini a veze o vleuniañ boaz diwarni...

Meizet e oa bet gant Gweltaz. A-benn ar fin. Kompren
a rae ar "rak eus ar perak" eus ar c'haozeadennoù
diziwezh kenetrezo a-zivout ar pezh a dalveze kement
ha "me", "te" ha "ni"... hag ar bed, hag ar Vuhez.

O paouez meizañ e oa ar c'hrennard he mousc'hoarzh
a eürusted skoet, n'eo ket warnañ e-unan, hogen war
rann donañ ha kevrinekañ Melani, war hec'h askre,

he c'hreizon, he "me" gwirion. Abaoe ma oant o-daou
e karantez an eil gant egile, diwar neuze hepken
e oa bet asantet gant Gweltaz d'ar gerioù-se e-giz
e re dezhañ e-unan dre ma oant eus o fouez evit an
dazont kouskoude...

Hag an un taol, war ar prim e oa bet graet e
venoz : "Me c'hell me ivez".

Diveizet ar gentel gantañ marteze, dre m'en doa
torret eus e du, krenn ha krak, pep ere e-keñver e
garantez kentañ, o kavout gwelloc'h gantañ mont-tre
e-unan-penn, e rouantelezh divent an Emanoudegezh...

(Da ziskuizhañ goude e bennad-hent kentañ e oa
chomet an den yaouank war ar sec'h war an draezhenn
ma komzen anezhi e deroù ar pennad, kent dezhañ ken-
derc'hel gant e veaj diabarzh...)

Ha deuet 'oa a-benn da derrañ kouskoude, unan,
da vihanañ, eus ar strobellad neudennoù a stage
anezhañ c'hoazh ouzh strobinnell ar merc'hodenner...
a vez graet Doue anezhañ ?...

(miz Eost 1979)

Herle DENEZ

DEV

Ofiser e oa Dev en arme Bro Iwerzhon. Letanant oa deut da vezañ. Den ne ouie re vat penaos, e gwirionez. Penaos en devoa, pazenn ha pazenn, tammig ha tammig, pignet gant derezioù an enor en arme, hep risklañ gwech ebet, hep terriñ e fas ha diskenn d'an daoulamm ? Didalvoud goulenn. Zoken evitañ, respont gant poell 'vije bet dic'hallus-mik. Da heul ar brezel bras (an eil), 'lec'h m'en doa spontet muioc'h ar Saozon eget an Alamanted (dioutañ e veze graet "an ofiser spontusañ bet gwelet abaoe kantvedoù" gant ar Saozon), e oa deuet da lakaat e anv war rolloù arme e vro. Gwelloc'h, a soñjas neuze, bezañ maget ha tommet brav en diotach-se eget chom da ruzañ botoù e-tal labouradegoù lazhus. Enskrivet e voe e anv gant un ofiser dister a-walc'h met aketus-kenañ, ha sur a-walc'h en deus c'hoazh hemañ keuz da vezañ graet kement-se. Rak, ar gwir 'oa gant ar Saozon. Be' oa Dev ar seurt ofiser a lak e genseurted da hetañ e vije un enebour evit gellout lazhañ anezhañ ha disammañ an tamm douar-mañ diouzh seurt lastez didalvoud. Ar soudarded, int, eveljust, a gare anezhañ kalz, ha lod anezho zoken, ar re washañ dre vras, o dije bet c'hoant da ober lakaat anezhañ da jeneral. Epañ, pe gentoc'h, lonkañ a rae 'vel ur gwir soudard, sakreal a rae kenkoulz, ha pa dremene un divesker flour ha stummet brav ne oa ket Dev an hini diwezhañ, nag a-bell.

Met, kaer en doa bezañ un ofiser eus ar gwashañ seurt, en em ren evel ar soudard epikuratañ, bez' en doa ur spered don ha lemm, bez' e ouie an tu da zi-

luziañ ar c'hudenoù diaesañ. Hag eveljust, bewech ma save un diaester bennak er c'hazarn, Dev an hini 'oa an diskoulm burzhodus, an den nemetañ. Ruzañ a rae ar serjanted dirazañ, int hag a oa bet o sakreal hag o c'hrozmolat, un nebeudig 'oa, war spered difoutre Dev. Al letananted a boke d'e votoù. Koman-dant ar c'hazarn a brofe segalennoù dezhañ ha gant mel dous liv an aour leun e veg :

" Kompren a rez, Dev, ur gudenn luziet-bras eo, ha gouzout a rez pegen feukidik eo paotred Kerry, pegen flemmus re v-Mayo. Disonjomp 'ta pep bruzunenn dister etrezomp. A-du, Dev ? Ale, ke, Dev; komz dezho, ya ? A, paotr mat ! Soñj am bo, Dev, soñj am bo...hag all, hag all...

Ha Dev, aze, a zalc'he anezho, evel brizhilli higennet-mat. C'hoari ganto a rae, gant an ofiserien c'harv-se, a valee ken brav er straedoù da vare Pask, met ken goulo o c'hlopenn, ken sentus, ken doujus, ken sujet d'an urzhioù diot. Karout a rae diluziañ ar c'hudenoù-se. Karout a rae c'hoari gant kizidigezh sot tud an arme, gant o zuioù fall hag o zuioù mat. Na drougiezh, na falloni, na fallagriezh enañ, tamm ebet. Atav prest da skoazellañ, koulz e vreurdeur hag e enebourien ; eñ, n'en doa enebour ebet, Dev. Met, karout a rae gwelout an dud noazh o spered dirazañ, pa vezent o c'hagouilhat ar wirionez gant gerioù ar gevier. Dont a rae neuze da vezañ surjian ar gerioù mouget hag an empennoù damguzhet. Troc'hañ a rae ar yezhadur hag ar frazennadur gant binvioù sakr ha kuzh, dianav d'an holl nemetañ, o c'houzout o implij.

Evel bep bloaz d'ar mare-se, e deroù an hañv, pa bege al laboused hag ar yaouankizoù da ganañ ha da vont a-goubladoù, pa groge ar bleunioù da wiskañ o dilhad a bep liv, pa zeue an douar da ziwiskañ e bal-lenn skorn flour ken splann ha da c'hortoz gant li-

kentez troc'h garv an alar, d'ar mare-se avat, ez ae arme Bro Iwerzhon da embregiñ. Rannet eo evel ar vro. Bez' ez eus arme an Norz, arme ar Su, hini ar Reter, ar C'Hornog, hag ivez arme ar C'h-Curragh, kazarn brasañ ha brudetañ Bro Iwerzhon, nepell eus Dulenn. Ha ret eo gwelout anezho. Ar yaouankizoù-se o vale, o redek, o lammat, o ruzañ war an douar tener, o youc'hal evel Indianed, o tagañ hag o tifenn tachennoù taouarc'h dirak kouerien skodeget, a soñj dezho ez eus bet dizoloet un tamm aour bennak en tommer-se. Ha pellik amzer e vez dalc'het ganto d'ar farsadenn, un nebeut mizioù, ha neuze, gant ar yenijenn gentañ, e tistroont d'ar "gêr" evel un arz aet ponner, ha sioulik o tont da gousket ha da c'hoañviñ. Met eveljust, pa zeu an arme da gantren dre ar c'horn-bro, e kasont d'o heul o c'hoarielloù : kirri-brezel (an nebeudig o deus, atav), o fuzuilhoù, o mindrailherezioù hag o c'hanolioù. Gant pep arme 'z eus ur c'hanoñ, un arouez e gwirionez. Kanolioù 'veI gwechall. O ! gellout a rafent tennañ c'hoazh, met den ne oar resis petra 'c'hoarvezfe. Setu e vezont implijet e vit merkañ an tachennoù, ha kollet 'vezont hag ad-c'houn ezet, kemeret-adkemeret dizehan, troet-distroet war-du an "enebour". Hag echu ar c'hoari, e vezont kaset d'ar c'hazarn en-dro, da heul an harozed skuizh.

Ha gwir, skuizh-faezh e oant da zeiz an distro. Ar seurt skuizhder a enlouc'h skeudenn ar gwele maderzhuz ha klouar er spered, ha netra all... An nozvezh-se e savas diouzh ar c'hazarn ur roc'hadeg sebezus, ur roc'hadeg a lezas ar gêriadennig mut ha dihun an noz-pad. N'eo nemet an deiz war-lerc'h e voe renket, kempennet, eouliet ha lufret an ardivinkoù... Unan... Daou... Tri... Pevar... P...??? A ! Sell 'ta ! Pevar... Tri... Daou... Unan... Ma Doue hollc'halloudek ! Met... Met... Komandant ! Komandant ! Ur... Ur c'hanol !... Ur c'hanol nebeutoc'h

a zo... Eo ! Gwir, Komandant ! Unan a vank ! Kontet 'm eus anezho, hag adkontet... Dibosupl ! Digredus ! Tu 'zo da goll un alc'houez, ur pod yoghourt, ur saladenn, ur spi, e hent, e yaouankiz, e amzer, e benn... ha me 'oar-me ! Mer ur c'hanol ! Ur pezh kanol mod-kozh gant rodoù bras hag all... Nann ! Ma Doue ! Chezuz ma Salver ! Dev ! Ya. Setu. Dev ! E pelec'h emañ al loen lezirek-se bremañ ? Er pub eveljust. O c'hoarzhin gant ar soudarded hag oc'h ober goap, a-nat eo !

Ha setu Dev ar strobinner stlejet dirak ar c'hommandant.

"Marteze, Dev, ho pefe klevet tud o komz diwar-benn an istor mantrus, petra 'lavarant, sebezus-se ?..."

- Peseurt istor, Komandant ? C'hwi 'oar, kement all a..."

- Ya, ya... Met sur e ouzit, neketa, ez eus bet disoñjet un draig war hon lerc'h ?

- A ! An istor-se, ya... ya... Mantrus... Ya... Sebezus a-walc'h..."

- Sebezus ! A soñj deoc'h ?... "Sebezus a-walc'h" ... Ma Doue ! N'ho pefe ket ur menoz bennak ? Kompren a rit, Dev, eo ret-mat deomp kavout un diskoulm, ha buan ! Petra 'soñjo an dud ? Ha petra 'lavarint ? Atav prest da c'hoarzhin goap, er vro-mañ. Kazetennoù... Skingomz, hag all... Ur c'hoarzhadeg ramz... Hag ar gwir 'vo ganto. "Kollet eo ar c'hanol. Ma welit anezhañ o pourmen, me ho ped, tapit krog ennañ ha degasit anezhañ d'ar chomlec'h-mañ..." Ur c'hoarzhadeg, pa lavarant deoc'h !"

Mut e chomas ar c'hommandant ur pennadig... Dreist-holl chom sioul ha poellek... Ha, morlivet e zremm, enkrezet e vouezh, e sellas ouzh Dev :

"Ma Chezuz, Dev, ar Saozon... Ha soñjet ho peus ? ... Ar Saozon !..."

- Ya. Eveljust. Ar Saozon. Kompren a ran !

- Mat. Da gentañ, chom sioul ; ha d'an eil, prede-

riañ. Ur segalenn, Dev ? Eus Bro Habana, dre ar Stadoù eveljust. Ur c'henderv din. Tan ?

— Trugarez deoc'h, Komandant. 'Maon o soñjal... Be 'vefe un diskoulm d'an istor-se. Eeun, aes ha sioul-kenañ, eme Dev, o vousec'hoarzhin hag o tennañ ur pezh kelc'hiad moked diouzh e segalenn.

— A ! Petra ? Pehini ? Penaos ?...

— Ma vank deoc'h ur c'hanol, hag anat eo, n'hellit ket prenañ unan, da gentañ peogwir int re gozh ha n'eus anezho nemet er mirdioù, ha d'an eil, peogwir e vefe brudet raktal an istor, neuze e soñj din ez eus un diskoulm nemetken..."

Sac'het e chomas ar gaoz un nebeut eilennoù. Gortoz a rae ar c'homandant.

" Dispar ar segalenn-mañ, Komandant, dispar... A ! Memestra, n'oc'h ket da glemm, Komandant. Ur vuhez aes, butun mat... A !"

Troc'het 'voe e gaoz a-daol-trumm gant mouezh reut ar c'homandant.

" A, ya !... An diskoulm... Mat, setu... Lakaomp Kolm, hon teuzer, da ober unan !"

'Vije bet lavaret d'ar c'homandant e oa e gazar-niad o paouez mont a-du gant ar Rusianed, 'vije ket bet talbaget muioc'h.

" Eo, eo, Komandant. Dastumomp kement tamm hernach a zo tu da gavout dre amañ, teuzomp anezho, ha greomp ur c'hanol heñvel-mik ouzh ar re all. Goude holl, pevar anezho 'chom ganeomp c'hoazh... A-benn ur sizhun 'vo echu pep tra. Petra 'soñj deoc'h ?

— Ma ! Ma soñj deoc'h... N'ouzon ket penaos n'am eus ket bet ar menoz-se ma-unan !

— Ho labour, Komandant, ho labour... Kompren mat a ran, gant labour ho karg, n'ho pije ket kalz amzer evit prederiañ diwar-benn traoù ken diresis ha dister a-walc'h...

— Ya, eveljust..."

Ne ouie ket re, ar paour kaezh komandant petra 'soñjal. Ken sirius hag ur pab o sakramantañ un ili-

zad eskibien e seblante Dev bezañ.

— Ma, Dev, karget oc'h d'ober war-dro al labour-se. A-du ? "

Hag e-pad an daou pe dri devezh goude e redas pep soudard er c'hazarn evel unan aet sot. Follentez an houarn a oa peg enno. Gwelet 'vezent o furchal, o furediñ e kement korn, e kement toull, e kement bern a oa. Pep tamm houarn dizimplij a veze kaset da deuzerez Kolm. Treid ar gweleoù a grogas da skarzhañ war-du e stal labour, plajoù an ofiserien a steuzias buan-souezhus. Met klemm ebet ne savas. Evit ar c'hanol e oa. Gwazh-a-se evit an hini a leze e forc'higell da strañ war an daol, pe e gontellig. Mudurennoù ha potailhoù a skarzhe diwar an dorioù. Urzhioù Dev 'oa bet sklaer ha taer kenañ : " Hernach, bremañ hag atav !" Ha zoken goude d'ar c'hazarn a-bezh bezañ bet "dishouarnet" e youc'he Kolm bepred :

— C'hoazh, degasit c'hoazh, en anv Doue !

E kêr, e krogas ar paour kaezh tud d'en em c'houlenn peseurt dioul ar c'hast a zeue da laerezh o c'hlouedennoù. Klouedennoù ! Che ma Doue ! Pebezh bro ! Hag an nozvezhioù da heul, ne veze hini ebet ken o soñjal mont d'e wele. Evezhiet 'voe ar c'hlouedennoù gant aked bras, evel pa vije bet merc'h an tiegezh o taremprediñ ur protestant milliget bennak. Ha gant ar gêriadennig a-bezh oc'h evezhiañ duder an noz diouzh un tu, bez' e oa diouzh an tu all Kolm an teuzer-meur o lonkañ houarn. Hag e teuze, e teuze, hag e teuze c'hoazh. Deut 'oa da vezañ kreizenn ar c'hazarn, ar gêrig zoken.

Ret e oa ivez, a lavaras Dev, kavout koad evit ar rodoù bras ha fust ar c'hanol. Ha diouzhtu ha gant plijadur e voe taolet en traoñ lochig ar bleud hag ar patatez. Dont a reas ar c'heginer da glemm un tamm, met ar c'homandant, den a zever, a respontas dezhañ, feuket bras gant seurt dismegañs ouzh e zle-

ad, e rafe gwelloc'h emellout ouzh e voued ha gwellaat anezhañ, rak war ar pezh 'oa bet ret dezhañ kle-vout ha tañva, siwazh ! bez' en doa, war an dachenn-se, kalz labour da ober...

E-pad ur sizhun e oa bet roet d'ar c'hazarniad a-bezh ur pal resis da dizhout. E-pad ur sizhun o doa holl labouret start ha gant kalon dindan urzhioù souezhus ha divoutin. Hag e teuas an devezh bras. Aozet 'voe un dibunadeg ken brav hag an deiz ma oa bet stlapet ar Saozon er-maez (pe dost d'an nebeutañ) dirak ar pemp kanol renket en ul linenn dindan ar banniel tri liv o stlakañ fier. Hag e krogas en-dro an holl gant ar vuhez evel gwechall. Aet e-biou follentez an houarn hag ar c'hoad, adpeget gant ar skubellenn ha gant ar skaotañ.

Ken e tistroas sioulik ha dievezh mare an embregiñ. Sachet ar pemp kanol diouzh ar c'hazarn dirak selloù disfizius tud kêr (soudarded 'oa bet o flegiñ sur a-walc'h, evet ganto ur pintad guinness pe zaou a re) ha dao d'an embregerezh. Hag aze avat, 'oa e-vezhiet brav ar c'hanolioù. Kontet 'vezent bemdez ha bemnoz. Gwardet a-dost e kement lec'h ma oant kaset. Ha deut poent da zistreiñ d'ar c'hazarn. Ur salud diwezhañ ha setu int peg gant hent an distro hag erru dizale soudarded, fuzuilhoù ha... kanolioù (ar pemp anezho, mar plij ganeoc'h) er c'hazarn.

Met !... Petra an diaoul ?... Ma Chezuz !... Ma Doue benniget !... Aze, e-kreiz ar porzh !... Dindan peul ar banniel... Ken brav ha ken kempenn... Ken flamm hag ar wech kentañ... Petra 'welas ar c'hazarniad a-bezh ?... Ar c'hanol all ! An hini 'oa bet kollet ar bloaz a-raok. An hini kiriek eus sizhunvezhiad follentez ar soudarded, nervennoù enkrezet an ofiserien, ged sabatuet an dud er gêriadennig. Buan ha buan e voent, ar ... c'hwec'h anezho, renket



d.jego



sk: d, jago

ha dreist-holl kuzhet mat en o loch. C'hwec'h kanol bremañ ! Ha penaos an diaoul e oa distro ar c'hanol-milliget-se er c'hazarn, goude ur bloavezh tremenet o kantren bro ? Sur-tre e oa bet gwelet pe glevet tra pe dra gant unan bennak ! Ne vez ket stlejet pe ziblasat ur pezh tra evel hennezh hep ober trouz, hep na vefe merzet gant, da vihanañ, ur c'hrak-kristen bennak !

" Ha neuze, Dev ? eme ar c'homandant kerseetoc'h-kerseetañ, o huñvreal gant spi hag evurusted er mare ma vo poent dezhañ mont war e leve, petra 'soñj deoc'h ar wech-mañ ?

- Sebezusoc'h-sebezusañ, Komandant. Ya, avat, souezhus bras !

- A lavarit ! Ha petra ober, en anv Doue ? Unan re a zo ganeomp bremañ. Penaos displegañ seurt tra da bennoù-bras Dulenn ? Lavarit din 'ta !

- Ya, diaes a-walc'h 'vefe, gwir eo. Met perak displegañ dezho ? N'eus nemet tud ar c'hazarn o c'houzout betek-hen. Ha goude holl, deuet omp a-benn da fardañ unan, ne zle ket bezañ kalz diaesoc'h lakaat anezhañ da steuziañ kuit...

- A soñj deoc'h ? Segalenn ? Tan ? Mat. Mat-tre. Ma soñj deoc'h. Met penaos ? Ken kas e vefe teuzet en-dro, petra 'rafemp gant ar bern hernach-se ?

- O ! Ne oa ket ma soñj teuziñ netra ebet.

- Ha petra eo ho soñj neuze ?

- Douarañ anezhañ.

- Douarañ ! Met... Met pelec'h 'ta ma Chezuz ? Ha prederiet ho peus war vent an toull 'vefe ret deomp ober evit douarañ ur seurt tra ? Ar gêriadennig a-bezh a ouife. A, Dev, n'oc'h ket sirivus !

- Sirivus kenañ, ma c'hredit ! N'eus nemet divontañ ar c'hanol, ur strollad soudarded a zouaro ar fust, unan all ar rod dehou, hag all... Ha ken kas e vije dizoloet un tamm gant ur c'houer bennak, kaer e c'hellfe an dra bezañ kasaus evidomp-ni, ken souezhet e vefe, ken ne soñjfe morse den ebet ez eo ur

c'hanol, divontet, a-dammoù.

— Ya. Mat. Goude holl, n'eo ket fall ar menoz. Mat, Dev, d'al labour ma faotr ! Gwelloc'h deoc'h labourat e-pad an noz, ha douarañ an tammoù ar pel-lañ ar gwellañ an eil diouzh egile. Lakaat a rin ur pennad e kazetennig kêr, o lavarout hon eus ezhomm bras da ober un tamm embregerezh-noz. Ya ?

— Mat-tre, Komandant. Dispar."

Diwar menoz Dev, e oa bet badezet an taol-gwidre-se "Taol Anjelika", diouzh anv gwreg ar c'homandant. Plijet bras e oant bet, ar c'homandant hag e wreg, p'en doa Dev goulennet o aotre diganto. Pemp strollad 'oa bet savet gant Dev. Renet gant Kolm, an teuzer-meur, ar strollad kentañ 'oa e garg divontañ ar c'hanol milliget-se, ha netra all. Ar pevar strollad all, dindan urzhioù bep a ofiser dibabet gant Dev, 'oa bet gourc'hemennet dezho ober an douaradur. Rannet e oa pep strollad e div lodenn. Unan a doullfe, eben a evezhife ar rannvro hag an tamm kanol, gant aon na c'hoarvezfe c'hoazh dezhañ bezañ sammet kuit. Diskouezet en doa Dev d'an tri ofiser all (eñ 'oa penn-rener da strollad ar fust houarn) pelec'h resis toullañ, douarañ ha goleiñ an tamm. Aozet brav pep tra gant Dev, urzhiet aketus evel ur wir dagadenn war gamp un enebour kuzh ha galloudus. Dibabet 'voe nozvezh "Taol Anjel", evel ma rae ar c'hazarniad eus gwreg ar c'homandant.

Ha setu deut an noz risklus ma yeas pevar karr-samm, pep hini gant e gargamant "kevrinus", hag ugent soudard, pep a bal ha pep a big ganto, kuzhet mat, da redek bro. Pa zistroas an holl anezho d'ar c'hazarn er mintin louet, a-dreuz ar gêriadennig didud he straedoù ha morgousket, e oa savet ar c'homandant evit ober gourc'hemenoù d'e soudarded skuizh ha lous met ken disamm o spered. Bez' e oa lorc'h en e wreg, hag ennañ ivez, ha gant gwir abeg, evit bezañ

roet hec'h anv d'un taol aozet ha kaset da benn en un doare ken kaer.

Un nebeut devezhioù goude, e c'helle an holl gazarniad, komandant, gwreg hag all, lenn kement-mañ er gazetenn :

" Un dizoloadenn souezhus. Kavet ez eus bet e Kontelezh g-Care ur pezh mell rod, war a seblant stlapet en ur poullig dour. O vont da gerc'hat e saout, evel pep endervezh, war-dro c'hwec'h eur, eo bet kavet ar rod-se gant an Ao. Molloy. Den ne oar resis eus pelec'h e teu ar rod, na perak eo bet stlapet aze. Bras kenañ eo-hi, ha dre m'eo bihan a-walc'h ment ar rodoù implijet war girri-skaonek ar vro, ne gomprenet ket re vat eus pelec'h eo deut. Tud ar vro n'o deus merzet netra divoutin er mareoù-mañ."

Tost da gaout ur fallaenn-galon hep distro 'oa bet ar c'homandant. Strollad ar rod zehou 'oa kiriek. E rener kentoc'h, an hini 'oa o stranañ er c'horn-se da geñver noz "Taol Anjelika". Peseurt soudard an diaoul 'oa hennezh ? Urzhioù en doa bet, nann ? Resis ha splann. Douarañ ar rod ha neket stlapañ anezhi en ur poullig-dour ! Ma Doue ! Ur poullig-dour ! D'al lez-varn e yelo ! Ha raktal ! Hag a-raok, d'an toull !

Ha kaer en doa bet ar paour kaezh Johnny, ur pezh mell korfad a zen eus kontelezh g-Kerry, lavarout, ha zoken youc'hal ne oa ket e fazi, d'an toull ez eas raktal, ha war-eeun.

Met, pevar devezh goude, yenaet ha sioulaet ar pennoù, an nervernoù hag ar speredoù, ha studiet gant evezh raktres "Taol Anjelika", e voe dizoloet ne oa an ofiser Johnny Mac Laughlin na kiriek na kablus. Ma 'z it da Vro g-Klare, e verzoc'h, da heul barradoù glav spontus, e teu an dour da stummañ lennoùigoù pe zoken lennoù. Ha ma klaskit neuze anv al lenn ken brav ha ken romantel-se war ar gartenn di-

goret war ho parlenn, ne weloc'h, strafuilhet ha sebezet, nemet un douarad taouarc'h pe ur berniad mein, ganto liv brav gell ha gwer ar c'hartennoù "Michelin : Guide touristique" a-hend-all. Eus dindan an douar e strink an dour, ha dre vras e pad ul lenn a seurt-se nebeut amzer (diouzh ar glav eveljust). "Turlough" 'vez graet eus ar seurt poullou gant tud ar vro.

Setu penaos, hag eñ deut d'al lec'h resis merket dezhañ, n'en doa kavet Johnny nemet ur poullad dour. A vro g-Kerry e oa, ha troioù-kamm Bro g-Klare 'oa dianav dezhañ. Soudard 'oa, sentus ha pennek, hag urzh a roas da stlapan ar rod el lenn, o soñjal eveljust ne zeufe den sot pe vezv a-walc'h da splujañ enni e-kreiz ar goañv.

Met bremañ avat, ret dieubiñ Johnny, hag ivez 'n em zigareziñ. Dreist-holl, dreist-holl, mougañ an istor. Soudard mat eo Johnny, kompren a raio, 'soñje ar c'haporal o vont d'e welout d'e doull.

" A ! Johnny, paotr mat ! Penaos 'mañ an traoù ? Ya, gwelloc'h e c'hellfent bezañ. Kompren a ran. Te 'wel, Johnny, deut omp da verzout, goude studiañ an istor gant aked, ne oa netra da damall dit, ma faotr, netra ebet. Disoñjet eo an istor, te 'oar, ha laouen on da lavarout dit eo...

- Ma revr, ya ! a darzhas Johnny, savet 'vel un tenn diwar e wele, ruz e zivjod, krizet e dal. Petra an diaoul 'soñj deoc'h 'vern din bremañ ? En toull brein ha flaeius-mañ on bet stlapet e-pad pevar devezh, mudet, graet ouzhin evel un treitour euzhus !...

- Met Johnny, prest omp...

- Prest ma revr, ya ! Dont a rit amañ gant sakre digareziou. Ne ran foutre kaer diouto ! Ma c'hredit, klevet 'vo a dra sur an istor-se gant lod all eget ur c'haporal, gast ar c'hast !"

Hag e kendalc'has da sakreal ha da c'hrumuzat outañ e-unan diwar-benn spered digalon an arme. Ha daoust'hag e ouie ar c'haporal 'pelec'h e plante John-

ny an arme ?...

Ar gwir a oa gant ar c'homandant. Feukidik-bras 'oa tud Bro g-Kerry, hag ur wech gloazet o lorc'h... Ma Doue ! Petra ober ? Kasomp ar serjant, gwelet 'vo...

" A ! Johnny, paotr onest ! Ur fazi mantrus, a laran dit, ya 'vat, gwir ! Abaoe 'maon er arme-mañ, n'am eus ket soñj eus ar seurt darvoud. Ha, ma faotr, setu tost da ugent vloaz emañ o servij ma bro. Met, bremañ, echu eo, neketa ? Disoñjet pep tra, splann ha sklaer !

- Splann ha sklaer, ma revr !"

Bewech ma lavare da Johnny tra pe dra, e kave tro bepred da vuhezekaet ha da nerzhekaet anezhañ gant gerioù ha stummoù ken divoutin ha flemmus.

" Un tamm re brim omp aet, re wir...

- Re brim un tamm ! Ma Doue ! Klevout seurt traoù ! Gwall brim oc'h aet, ya, sur ! Ha mall bras warnoc'h ivez da zisoñjal pep tra ken buan all ! N'on ket ken sot-se memestra... Kompren a ran, re vat ! Nann, uheloc'h e yin, ya 'vat, kalz uheloc'h !..."

Pa zeuas-tre al letanant en e loch, e savas Johnny eus e wele koad hag e saludas evel ar soudard mat a oa, met atav ken taer ha ken flemmus e kasas al letanant paour da sutal ha da brederiañ diwar-benn pe c'hedoù marvel ar bed-mañ. Ret mat 'oa d'ar c'homandant plegiñ. Pa zegouezhas e toull-bac'h Johnny, e savas hemañ 'vel un tenn, hag e saludas 'vel ma vije bet holl jeneraled ar vro dirazañ.

" A ! Johnny, paotr feal ha dellezek ! Un istor ken mantrus, mantrus... N'ouzon ket penaos eo c'hoarvezet ur seurt tra !..."

- Ma, Komandant, degouezhet eo, ma c'hredit !

- Siwazh, ya, Johnny ! Ha me an hini mantret ar muiañ... Eo, eo, Johnny ! Met bremañ, Johnny, bez' e c'hellez bezañ sur, ya, sur-tre e c'hellez bezañ, disoñjet eo pep tra. Netra ebet war da zosier, John-

ny. Gwenn evel a-viskoazh. Splann ha naet evel m'eo bet bepred. Dossier ur soudard onest, eeun, feal hag atav prest da labourat evit servij e vro hag e dud !

— Moc'haj, Komandant ! Moc'haj tout ! Petra an diaoul 'vern din ho tosieroù ? Hag e soñj deoc'h e c'helloc'h kaout an disamm diouzhin gant istorioù bugel ?

— A, Johnny, chomomp sioul ha kempouez evel an dud sevenet ma 'z omp-ni. Ret eo soñjal, Johnny gaezh, ma vez brudet an istor-se, eo ar c'hazarniad a-bezh an hini 'vo graet goap outo, da vignoned, an arme... Da familh, Johnny, eo, eo ! da familh !...

— Familh ma revr, Komandant ! "

Liv un domatezenn azv brav a ruzias divjod dousik ha maget mat ar c'homandant.

" N'eus deut hini anezho, hini ebet eus ma familh, 'vel ma lavarit, d'am skoazellañ. Ha petra 'vern din 'vefe klevet an istor-se gant tud Dulenn ? Er c'hontrol ! Hag istor ar c'hanolioù war un dro, kement hag ober '..."

Ma Doue, a soñjas ar c'homandant, foll-mik eo he-mañ. Piv 'harpo anezhañ ? 'N em welout a reas e-tal un toullad jeneraled, el lez-varn. Ha neuze, Komandant O '...', hervez e kollit kanolioù hag e savit kanolioù nevez gant klouedennoù laeret, ha gwelloc'h c'hoazh, stlapañ a rit en toull soudarded feal. Ma Doue !

" A, Johnny ! eme ar c'homandant, kompren a ran ac'h eus gouzañvet, gloazet eo bet da lorc'h, ha peadra 'oa ! met arabat bezañ ken start-se ganeomp. Ur segalenn, Johnny ?

— N'ho po ket ac'hanon gant ho segalennoù, Komandant ! Poent bras eo d'an dud gouzout ar wirionez. Tud kêr da gentañ, ar c'hazetennoù da c'houde... Evel-se 'vo, gast ar c'hast !"

Pa zistroas ar c'homandant, abaf ha mantret, d'e vurev, ne ouie mui peseurt sant iwerzhonat aspediñ.

Hag ur rejimantad mat anezho 'anaveze koulskoude ! Doue ! Petra ober ? Dev, eveljust ! Setu an den ! Ha goude holl, daoust ha ne oa ket kablus un tamm ivez ? Fiziout ul labour ken amjestr en un den ken pennek, ken sot, ken strizh e spered ! Un ofiser speredek an hini 'oa ret kas, lemm e spered, poellek. Unan gouest da ziluziañ ar gudenn, buan ha brav. Bez' ez eus c'hoazh lod anezho, nann ? Tri mil c'hast !

" A, Dev, amañ 'maoc'h ! Poent bras ober un dra bennak diwar-benn Johnny, c'hwi 'oar !. Ya, tremen poent, zoken ! Ar penn-beulke-se a nac'h chom sioul. Prest eo da vont da welout ar c'horonal, ar c'hazetennoù, ha me 'oar-me !..."

Skeudennoù dioutañ e-unan a rambree en e empenn pennfollet : gwisket gant pilhoù, o skubañ riblennoù ar gêriadennig, pe o werzhañ kazetennoù e kornioù ar straedoù.

" Ya, eme Dev. Klevet 'm eus ar paour kaezh serjant o klemm war an doare euzhus ha diresped m'eo bet kaset da satal gant Johnny. Tud spontus, re g-Kerry !

— Met perak an diaoul mont da fiziout seurt labour ennañ ?

— A, Komandant, ur paotr mat eo hon Johnny ! Ha direbech ar soudard. Un tamm strizh e spered, met onest. Ur wir soudard anezhañ, neketa ?

— Dev ! Komandant da seurt tud on ! Me ho ped !"

E-pad pegeit c'hoazh avat, a soñjas ennan e-unan. " Digarezit, Komandant. Soñjal a ra din am eus ur menoz bennak.

— A ! eme ar c'homandant.

— Ha reiñ a rafec'h din an aotre da implij ho paperioù ha tamponoù ?

— Ya, ma fell deoc'h. Kompren a rit am eus c'hoant bras e vefe echu ar buanañ posubl gant an istor diot-se !

— Mat-tre, Komandant. Kement-se 'vo graet."

An tamm bastard anezhañ, 'soñjas Dev. Tamm segalenn ebet ar wech-mañ. C'hoant bras, ya, sur; kompren a ran. Loen ma 'z eo. Spontet-marv eo. Deomp da welout e damm feneant a sekretour.

"A ! Derek, lezireg ma 'z out ! Penaos 'mañ kont ? Netra d'ober 'vel boaz !

- Sell 'ta ! Dev ! Lonker daonet ! Petra 'zeuez da ober dre amañ ? Istorioù c'hoazh ?

- Te 'oar mat, Derek, eo prest kalon ar c'homandant da darzhañ dre fazi ar penn brell all. Ro din ur baperenn gant holl gachedoù ha tamponoù ar burev milliget-mañ. Paotr mat ! Ha bremañ, skriv 'ta."

Hag e pegas Dev da zesrevell :

"Me, Komandant ar c'hazarn..., eus Kontelezh ..., a zieub an ofiser Johnny Mac Laughlin, gant kildalvoudegezh. Ne vo dalc'het kont ebet war e zosier eus an devezhioù toull-bac'h en dije gellet ober."

"Gouzout a rez penaos echuiñ, Derek. Tampon ar c'homandant, ha dao dezhi !"

Pa zeuas-tre Dev e toull Johnny, e vousec'hoarzhe 'vel ur bugelig onest ha laouen o kuitaat ar skol.

"Ma ! ma faour kaezh Johnny, ur gwall istor, neketa ? Met echu eo bremañ ! Ur vezh sparlañ ac'hanout evel-se, ur gwir vezh ! 'Vel 'vije bet muntret tad ha mamm ganit ! Te, ur soudard ken mat !"

Ar paour kaezh Johnny ne ouie ket petra soñjal. Ar re all, serjant, kaporal, letanant, komandant hag all, holl anezho ofiserien, ya 'vat ! ar re-se 'oa an enebour daonet, ar gwashañ ouenn. Met Dev, eñ, petra soñjal ? Nouspet gwech 'oant aet, an daou anezho, skoaz ouzh skoaz, da riboulat ha da verc'heta tro ar vro. Nouspet gwech o doa rannet an hevelep grabailh, baleet kost ha kost, kanet a-gevret, sikouret an eil egile. Ya, sur, paotr mat 'oa Dev. Ha koulskoude, koulskoude... Gouzout mat a rae Johnny e oa Dev un ofiser divoutin ha rouestlet. Pep tro ma save reuz er c'hazarn ha na zeue den ebet a-benn d'e sioulaat,

Dev an hini 'veze kaset da renkiñ pep tra.

Fi ha disfi a oa e spered Johnny. Spi ha dispi a leunias e galon. Enebour pe geneil ? E penn ledan Johnny, ne oa lec'h nemet d'ur menoz war un dro. Ha Dev a ouie mat e peseurt stad 'oa an den. Deuet 'oa da anavezout anezhañ buan a-walc'h dre forzh bevañ en hevelep kazarn, hag a-benn ur sizhunvezh bennak en doa graet tro an den, ha zoken, an distro.

"Te 'wel, Johnny, pa 'm eus klevet an istor-se on bet mantret. Ya, mantret, sebezet-mik zoken. Met an arme eo, ha ret eo mont war-bouezig, gouzout mat a rez, penaos 'mañ an traoù amañ !"

Mut e chomas Johnny, o c'hortoz.

"Neuze, a gendalc'has Dev, gortozet 'm eus e teufe ar c'homandant d'az kwelout, rak, gouzout a raen ne blegfes ket. Ha mat 'c'h eus graet, Johnny ! Ar gwir 'zo ganit, ya 'vat ! Ar gwir kristen ! Neuze, on aet da welout ar c'homandant, te 'wel, ha goulennet digantañ sinañ ur baperenn evidout. Sell, Johnny, amañ 'mañ !"

Hag e tisplegas Dev ar baperenn dirak fri Johnny. Gant e zaouarn ledan ha kreñv e pegas enni gant mall. Lenn a reas, goustadik, o tistagañ fraezh pep ger. Dev a sante ennañ disfi an den eeun diwar ar maezioù don, kollet kerkent ha m'eo ret dezhañ 'n em zibab gant ur skrid bennak, kerkent ha ma teu da lakaat e spered da gompren ur frazennadur digustum, un dra n'eo ket lavaret splann, met un dra hag en deus talvezet a-viskoazh da douellañ ar re baour, da ziber-c'hennañ anezho diouzh o madoù, o douaroù.

"A, met Dev, petra 'ta 'dalvez ar gerig-mañ, amañ ?"

Ha biz tev Johnny a guzhas ar ger.

"Gant kildalvoudegezh. Ya, hennezh. Morse 'm eus klevet an dra-se !

- A, netra tout, Johnny ! Te 'oar, ar re-se a soñj dezho e ouzont pep tra gwelloc'h egedomp-ni. Hag e lakaont gerioù brav ha dianav evit sebezif an dud ha

diskouez dezho int desket bras ha galloudus. An dra-se, Johnny, a dalvez 'mañ ar gwir ganit, hag eo echu ha tremenet pep tra. Stourmet 'm eus evidout te 'oar. N'eo ket bet aes."

Dalc'hmat e rene an disfi war spered Johnny.

"Met Dev, 'm eus c'hoant ebet 'vefe echu ! Ar c'hontrol mik ! 'Maon e soñj mont uheloc'h, da Zulenn, da blantañ reuz. Hag e rin !

- Ar gwir 'zo ganit, Johnny. Kudenn ebet ! Ma fell dit mont da Zulenn hiziv, raktal, bez' e c'hellez ! Sin ar baperenn-mañ hag e vi dieub ha frank evel ul labous-mor. Ha gellout a ri plantañ kement a cheu ha ma plijo dit. Hag ar gwir 'vo ganit !"

Tamm ha tamm ez ae disfi Johnny e-biou, evel an amzer o tremen e ti ar re gozh, pa c'hortozont, digredik, an eur diwezhañ. Skeudenn Dev, ar paotr mat, ar breur feal a-viskoazh, ar c'heneil kozh hag onest 'n em sile en e spered, 'n em live, skedus hag alaouret he livioù, war vogerioù griz ha louedet an toull.

"Ma, eme Johnny, ro din ur bluenn bennak, Dev. 'Maon o vont da sinañ da damm paper daonet. Ha ker-kent er-maez ez in da welout ar c'homandant da zougen klemm."

E vizied diampart a begas er bluenn hag a zuas gwenn ar baperenn gant ur sinatur eeun ha sklaer. A-ketus bras, e silas neuze Dev anezhi e godell diabarzh e chupenn soudard.

"Paotr mat, Dev ! Deomp da riñsañ ur pintad bennak. Trec'h e vimp bremañ !"

Ur gwall riboul 'oa bet, ma Chezuz ! Graet gourc'hemennoù da Johnny gant an holl. Hag an holl a-du gantañ, prest da lonkañ letanant, komandant hag all... Evit lonkañ, sur, lonket 'oa bet an nozvezh-se !

An devezh goude, pa zeuas Johnny, divadaouet mat, troc'het brav e varv, eeun ha naet e gravatenn, da welout ar c'homandant, e saludas bravik, ha gant mouezh an den diarvar war e dachennad douar o pour-

chuiñ an estrañjourien villiget a daolioù fuzuilh, o c'houzout e vo al lez-varn diouzh e du, o welout en a-raok kleze arc'hant ar gwir o troc'hañ a dammoù, o vruzunañ kig hag eskern an ofiserien-se, e pegas da gomz :

"Ma c'homandant, deut on da zougen klemm. Ha c'hoant 'm eus 'vefe kaset ma c'hlemm ar buanañ posubl da Zulenn !"

Derou ur mousc'hoarzhig tener 'n em silas war vuzelloù ar c'homandant. Mousc'hoarzh ur jezuist o komz diwar-benn ganedigezh Hor Salver Jezuz Krist.

"Ma Doue, Johnny ! Met dougen klemm diwar-benn petra 'ta ?

- A ! Gouzout mat a rit diwar-benn petra, Komandant ! eme Johnny, tamm ebet tuet da c'hoari ar jostrom.

Mousc'hoarzhuc'h-mousc'hoarzhuc'hañ e tennas ar c'homandant ar baperenn bet sinet gant Johnny an deiz a-raok, ha goustadik e tisplegas anezhi.

"Setu ur baperenn hoc'h eus sinet dec'h, neketa ? a c'houlennas ar c'homandant.

- Ya, eme Johnny. Met..."

Hag e pegas ar c'homandant da lenn a vouezh uhel, o tistagañ fraezh ar gerioù. Neuze e santas Johnny, evit ar wech kentañ, e c'hoarveze un dra direizh bennak. Pegiñ a reas da zamfiñval war e dreid, evel pa vije bet chal e spered o lakaat e zivesker da fiñval drezo o-unan. Lamm e galon a greskas. Santout a rae, mouget don ennañ, met o sevel evel un tarzh-mor drastus, amzer e vugaleaj. Bez' e oa dirak ar mestr-skol argazhet, un argazh mouget e-pad kantvedoù met ken kreñv, ken don ennañ, un tregont vloaz bennak 'oa, pa oa lavaret dezhañ penaos resis distagañ ar germañ-ger, e saozneg flour, hag hemañ, hag hemañ... Pa oa lavaret dezhañ e oa tremen poent evitañ dont da zisoñjal an tamm trefodach sot ha mezhus, rak ur wezh e oa neketa, 'pezh en doa komzet betek-hen. Ha seurt tra a dalveze evit an holl laou anezho. Pa oa

lavaret, huchet dezhañ, e oa ur yezh nemetken, ya, ur yezh nemetken da c'houzout evit dont a-benn er vuhez. Ha daoust ha gouzout a ouie Johnny pehini 'oa ar yezh-se ? Ha "ya, ya, ya," a vesteode Johnny bihan, selloù e zaoulagad spouronet peg ouzh reolenn beuz ar beleg, prest da skeiñ. Pa sav anken hag enkreuz en ho kalon dirak ar galloud o vousec'hoarzhin, hag e soñj deoc'h emañ ar gwir ganeoc'h, ha seul-vui e komzit, seul-vui e vousec'hoarzhin ar galloud. TOUELLET ! Setu ar ger a skoe dizehan e spered. Touellet, ya ! Met, nann, ne c'helle ket bezañ bet touellet gant Dev ! Pas Dev ! Ha penaos 'ta 'vije bet touellet ?

" Neuze Johnny, ar baperenn-mañ hoc'h eus sinet, nann ?

- Eo, met...eme Johnny, o klask ampellat c'hoazh taol kuzh ha diresis ar wirionez.

- Johnny. Hervez ar baperenn-mañ, n'oc'h morse bet stlapet en toull, ha sur a-walc'h ne voc'h morse taolet en toull. Evidon-me, n'eus morse bet istor ebet ! Sklaer eo ! Setu. Echu ganin, Kaporal Mac Laughlin. Goulennoù ?..."

Penaos e kuitas burev ar c'homandant, ne ouie ket. Ha saludet en doa pe nann, n'en doa ket soñj. Talbaget ha spouronet war un dro, abaf ha mut, skodeget ha dispered e chomas e-kreiz porzh ar c'hazarn, difiñv-mik evel ur peul o vreinañ.

Gant kildalvoudegezh !!! Gant kildalvoudegezh !! Al loen brein ! Kildalvoudegezh ha Dev : tasmantoù euzhus ! E vuhez-pad e ouife. Kildalvoudegezh ar c'hanol daonet ! Ha tammig ha tammig e savas ar feulster ennañ. Feulster ar re douellet. Feulster ar re goull o daouarn dirak fuzuilhoù o fiñval. Ar c'hoant foll da zistrujañ, da derrañ traoù a dammoù. An ezhomm klañvidik da lazhañ, da zistripañ, da vougañ, da veuziñ, da zeviñ bev...

Harpañ 'reas an hini kentañ a dremenas dirazañ.

" E pelec'h 'mañ al loen brein-se, al lastez flærius anvet Dev ? E pelec'h ?" a huchas Johnny.

Yaouank ar soudard. Klevet en doa an istor, kon-tet dre ar munud, e dek doare disheñvel d'an nebeutañ.

" A ! Johnny, penaos..."

- Johnny ma revr ! Kaporal Mac Laughlin ! YA ? Komprenet eo ?

- Ya, Kaporal Mac Laughlin ! Mat, Kaporal Mac Laughlin !"

Euun 'vel un tenn e chomas ar paour kaezh soudard, o saludiñ. Eus Dulenn e oa, ha n'anaveze ket gwall vat temz-spered tud Kerry. Met nerzh Johnny, avat, 'oa brudet bras er c'hazarn. Ha chom yaouank ha dennus e-tal e goantenn ken dous en doa c'hoant. O welout stad ar c'haporal Mac Laughlin, ha dreist-holl o klevout e yezh, e soñjas 'oa gwelloc'h dezhañ chom hep leñvañ pe vousec'hoarzhin an disterañ. Dreist-holl chom hep mousc'hoarzhin. Reiñ ur respont berr ha poellek d'ur c'haporal fuloret. Setu an dalc'h.

" Aet eo kuit da embregiñ war ar maez, Kaporal. Er mintin-mañ abred, Kaporal !

- Ha pegoulz 'vo distro ar bern breinadur flærius-se ?

- O ! Ket a-raok ur miz da vihanañ, Kaporal !

AN TREN

An Aotrou Kudenneg a renkas gant evezh an traoù war e daol-skrivañ evel ma rae bep gwener da noz a-raok kuitaat e labour. Goude bezañ goulloet ar gest-paper, ha lakaet un toullad paperoù en diretenn, e sellas ouzh an horolaj. C'hwec'h eur hanter e oa ha teñval dija er-maez. "Ar goañv" e soñjas en ur huadnadiñ goustadik. Skuizhus-bras e oa bet ar sizhun. Pa zeue vakañsoù Nedeleg e veze evel-se atav. Dalc'h-mat e oa tud ha n'o doa ket c'hoant da baeañ ha ret e oa skrivañ dezho ur bern lizheroù. Renkadurioù a oa ivez d'ober, ha goude : ar gouelioù bihan disoñ-jet du-mañ du-hont hag a voe lidet e-pad ar sizhun a-raok ar vakañsoù. Bepred e voe un dra bennak da lidañ. Dimezet e oa ar penn konter gant ar sekretourez nevez. An aotrou Frieg en doa bet ur verc'h ha skeudennoù eus an hini vihan a ziskoueze d'e gevredereur. Skuizh-marv e oa aet gant tout an traoù-se, eñ hag a chome atav en e di ha na eve morse alkool nemet da geñver an darvoudoù bras. Ret eo lavarout e oa bet kustumet da vevañ sioul rak paotr yaouank kozh e oa chomet.

"C'hoant am eus da ziskuizhañ un tammig...Ha ma 'z afen da welout ma zud e Plouared ?" en em lavaras. Gwiskañ a reas e borpant ha lakaat a reas e dog. Noz e oa er-maez. Difiñv ha yen-skorn e oa an aer. "Un amzer d'ober erc'h" a soñjas a-greiz distroñsañ kolier e borpant.

An aotrou Kudenneg a savas abred an deiz war-lerc'h C'hoant en doa da gemer an tren kentañ evit Plouared. Gwellañ pezh eo e chome c'hoazh an tren a-sav ur mu-

nud pe zaou e Plouared. Mont a reas d'an ti-hent-houarn un nebeut a-raok seizh eur. Dre ma chome an tren er porzh-houarn e-pad an noz, e oa sur da gavout ur plas da azezañ e-kichen ar werenn ma errue abred. Minaouediñ a reas e diked a-raok mont d'ar c'hae seizh. Didrouz ha kazi didud e oa ar porzh-houarn. An trenioù difiñv ha teñval a oa heñvel ouzh euzhadennoù houarn divent war o api, prest da lammat d'an disterañ trouz. Kemeret hoc'h eus dija un tren en noz ? Iskis ha nec'hus eo evel pa n'afed da lec'h ebet. Pa erruer war ar c'hae, en em santer gwasket evel pa vefer o kuitaat ur bed evit ur bed all, e-lec'h n'eus nag amzer na badelezh. Pe marteze en em veskont ?... E-unan, kollet en em gaver, torrbilet gant un nerzh dianav ha spouronus, eneptuet a-drasur. Hag ar redadenn o komañs en deñvalijenn, enetra. Pa seller dre ar werenn, ne wel an den netra nemet e skeudenn teñvalaet ha dont a reer da esperout e tremenfe ur c'hontroller bennak, hag a broufe d'an den eo bev mat.

Ne oa den ebet. O c'hortoz pe o kousket e oa an tren ? Piv a oar... Re abred e oa hag ar bagonioù ne oant ket sklerijennet. An aotrou Kudenneg a ziskennas hag a glaskas ur c'hombod. E valizenn a lakaas er roued metalek a-us hag er c'horn ez azezas e-kichen ar werenn. Damsklerijennet e oa ar vagon gant gouleier ar c'hae met ne gave ket diaes an aotrou hag a oa dija dangousket. Mousc'hoarzhin a reas pa soñjas en e dud : n'en doa ket bet amzer da welout anezho abaoe ur miz. Gwelout a reas en e huñvre petra a oa o vont da dremen. E vamm a oa oc'h ober kram-pouezh ed-du evel ma rae bewech ma errue a-daol-trumm. Evañ a rae jistr ar gêr gant e dad ha komz a raent eus jistr ar bloavezhioù tremenet. Goude e roe e dud dezhañ keloù eus ar familh, e lavarent piv a oa ganet, dimezet pe marv er barrez. Gwelout a rae e dad o tanañ e gorn-butun hag e vamm azezet e-kichen an oaled, ar c'hazh war he barlenn. Chom a raent dilavar ur

pennadig amzer ha neuze e kroge ar goulennoù : " Penaos emañ kont gant da labour ?...Ne gavez ket hir an amzer da-unan-penn ?" Hag e vamm o lavarout c'hoazh en ur hejañ he fenn : "Du-se emañ an traoù tout etre treid sur a-walc'h ! Bevañ e-unan a zo ur glac'har evit ur paotr." Ret e oa dezhi reiñ da gompren e oa poent bras dezhañ kavout ur wreg. Evit lavarout ar wirionez ne glaske ket. Evel just en doa c'hoant dimeziñ rak ur plac'h yaouank en doa karet. Gwechall... pell a zo... Met aet e oa an dimezell gant unan all. Trubuilhet e oa bet hag abaoe n'en doa ket sellet ken ouzh ar merc'hed.

An aotrou Kudeneg a zihunas hag a vazailhas en ur dreñ e benn etrezek ar prenestr, met ne welas netra rak teñval-sac'h e oa er-maez. E skeudenn a vazailhas ivez. Un tamm sell a reas ouzh e eurier. Eizh eur e oa neuze. Lambaol ne oa ket pell ken bremañ.

Dihunet e voe gant ur stroñsadenn. Deiz e oa. An tren a oa a-sav. A-daol e savas, ar prenestr a zigoras evit gwelout petra a c'hoarveze. Ur vouezh a youc'has : "Plouared, Plouared". Met ne welas den ebet. E valizenn a gemeras.

Chom a reas ur pennad war ar c'hae e valizenn en e zorn. Ya, porzh-houarn Plouared an hini e oa. Ha koulskoude ! Mont a reas goustadik war-du an digor ha dre ma tostae e c'hlaze e zremm. Bremañ e oa dirak an ti bihan hag un den a zeuas war-du ennañ. Paotr ar porzh-houarn e oa.

" N'eo ket mat an traoù ganeoc'h aotrou ?" emezañ. Ne fiñvas ket, ne respontas ket. Ar valizenn a gouezhas diouzh e zorn. Digeriñ a reas e c'henou evel p'en dije c'hwitet war e alañ. E zaoulagad spouronet a oa stag ouzh an den hag e kouezhas semplet.

Pa zifallas e oa ledet war ur bank en ur gambr-studi vihan. Un den a oa stouet a-us dezhañ.

"Gwelloc'h eo an traoù ganeoc'h bremañ ?"

An aotrou Kudeneg a sellas outañ abafet e zremm hag a hiboudas :

"E pelec'h emañ ?"

— Met e porzh-houarn Plouared, Aotrou. Disonjet hoc'h eus ?

— N'am eus ket, a respontas erfin.

— Setu emañ paotr ar porzh-houarn hag en deus galvet ac'hanon, eme c'hoazh ar medisin.

En ur welout paotr an hent-houarn o tont e-barzh e laoskas ur skrijadenn. An daou zen souezhet a sel-las an eil ouzh egile.

" Daoust petra a c'hoari ganeoc'h ? a c'houlennas ar medisin.

— Netra, emezañ en ur azezañ. Me 'gave din am boa gwelet...

— Gwelet petra ? emezont o-daou.

— ...Netra...N'eo ket a-bouez. Un tammig on skuizh setu tout."

An aotrou a yeas er-maez hag e voe darbet dezhañ semplañ adarre met difallañ a reas. Skuizh-tre e tlee bezañ met ne oa ket re sur. Krenañ a rae met ne oa ket gant ar riv. Mont a reas en hent evel un hunval-leer. Divinout a rae petra a oa o vout da gavout : un dra euzhus e oa. Kenderc'hel a rae bepred koulskoude en ur drabidellañ. Penaos e c'helle bezañ c'hoarvezet kemend-all ?

Dre ma 'z ae war-raok e kreñvae e zrouksant abalamour d'an dud ha d'an traoù a wele en-dro dezhañ. E euzh a vrasae. 'Benn ar fin ez erruas e ti e dud. Eus pell e welas ur vaouezh kozh o tennañ dour eus ar puñs. Tostaat a reas un tammig. Souden e chomas a-sav en ur anavezout anezhi.

" Ma Doue !" a haketas o horjellañ e benn gant dizesper. Liv ar marv a oa en e gerc'henn. Krenañ a rae e izili. E vamm-gozh an hini a oa met... marv e oa abaoe tregont vloaz evel ma oa marv ivez paotr an hent-houarn dek vloaz a-raok. Hag ar c'hrennard a oa o redek er-maez an ti war-lerc'h ur yar...

" N'eo ket Doue posubl... Me an hini eo !"

Ar person a hejas e benn hag a chomas hep komz. Goustadik e valeas etre ar c'hadorioù ha trouz e gammedoù war an daroù a zassenas dindan ar bolzioù uhel. Komz a reas :

" Mat hoc'h eus graet dont d'am gwelout paotr."

Daousoñj a reas a-raok kenderc'hel :

" Evel just, gallout a rit adkemer an tren da vont war ho kiz... met dañjerus eo."

Ne gomprens ket an aotrou Kudeneg hag a soñje dezhañ e oa echu e gudennoù.

" Dañjerus ? emezañ. Penaos... danjerus ?

— N'on ket evit lavarout deoc'h." Hag eñ kuit.

Adkavout a reas ar gêriadenn gant he skouerioù.

" Petra a c'hellfe c'hoarvezout ganin ? An traoù a yelo mat. Me a gemero an tren adarre da zistreiñ da Roazhon. Me a adkavo ma lojeiz, ma labour, tout an traoù a vo evel a-raok... a-raok PETRA ? Ur gwall-huñvre.

Pa erruas en ti-hent-houarn e oa kazi o redek. E zorn a grene pa gemeras an tiked ha ne verzas ket sell paotr an dorikell. Gortoz a reas un eur-vat e-unan e yenijenn ar c'hae hep diskregiñ diouzh e vali-zenn. 'Benn ar fin e klevas trouz ar marc'h-du. E galon a zaoulammas... Ha ma tremenfe an tren hep chom a-sav ? Ha ma c'hoarvezfe un dra bennak da herzel outañ da vont kuit ? Met an tren a oa dija o c'horrekaat... An aotrou Kudeneg a azezas er c'hombod kentañ. Un taol c'hwitell hag an tren war-raok.

En em santout a reas aesoc'h goude ur pennad. Ne gomprens ket petra a oa erruet gantañ met ne oa ket a-bouez ken. Sellout a reas ouzh ar maezioù hag a dremene a-dreñv d'ar prenestr. Ne glaskfe ket kompren, displegañ. Ne gomzfe da zen ebet diwar-benn an dra-se. N'eus forzh penaos, piv a gredfe anezhañ ? Tud a lavarfe e oa troet e benn. Graet e vefe goap

dioutañ. Marteze e vefe savet e dreid dezhañ. Gwelloc'h e oa tevel. Tevel ha disoñjal.

Hir e kavas an amzer betek Roazhon. Pa ziskennas war ar c'hae e oa stad ennañ.

Tremen a reas e-biou d'ar borzhierz ha saludiñ a reas anezhi. Met ne respontas ket, ar pezh a gavas iskis. Gwelout a reas ivez e amezeien. Int ne weljont ket anezhañ kennebeut. Pa erruas dirak e zor e oa strafuilhet e galon goude ma oa bet laouen.

E zor a zigoras hag ur vaouez e kañv a yeas ermaez. E c'hoar e oa.

" Ivona ! " a youc'has pa dremenas dirakañ hep e welout. Er skalieroù e oa dija. N'he doa ket gwelet. N'he doa ket klevet.

" Me a zo aet sot ! " a soñjas.

Mont a reas e-barzh. Tremen a reas an Ankou dreistañ pa welas e familh en kañv bodet en-dro d'ur chapel-wenn... E chapel-wenn... E HINI !

+
+

Diroudennet en doa an tren damdost da Lambaol. An holl veajourien a oa bet lazhet.

Jean COCTEAU

AR PAOUR KAEZH MARTOLOD

Gwerz e tri arvest

troet diwar ar galleg gant Beatris Jouin

Roll ar c'hoarierien

Ar wreg	An tad-kaer
Ar martolod	Ar c'heneil

An arvest a zo en ur porzh-mor. Rannet eo al leur-c'hoari e teir lodenn bihan-meurbet. Ar rann a-gleiz hag an hini a-zehou, a zo ur bar - hini ar wreg - hag un davarn - hini ar c'heneil -. E-kreiz, ul leurenn strizh, a vez gwelet ur vandenn c'hlas hag uhel er penn pellañ anezhi : ur straed an hini eo, gant an oabl glas hag ar mor etre an tiez.

Digoradur gant ar piano mekanik.
E-barzh ar rann gleiz (e ti ar wreg).

ARVEST KENTAÑ

Ar wreg. Plijout a ra deoc'h dañsal ?
Ar c'heneil. Da lavarout eo
E plij din hep plijout din. Dañsal a ran
Amañ hag ahont ; hor martoloded
a anvez atav an dañsoù nevez.
Etre kenseurtes e tañsont.
Pianoioù mekanik a zo
bremañ war al listri.
Neuze 'ta, ez eo trawalc'h din
sellout outo o tañsal
eus a-dreñv va zaol-gont.

Ar wreg. Eñ a zañse mat.

Ar c'heneil. Biskoazh n'eus bet gwelloc'h dañser en arvor
Ha pa zañse ar valsenn
Ne veze ket mui gwelet e dreid.
E zremm avat a veze gwelet
A bep tu war un dro.

Ar wreg. Daoust, daoust din bezañ trist
em eus desket dañsal.
Me am eus, daoust d'am zristidigezh
desket dañsal.
Evit ma teufe en-dro. Siwazh !
goude pemzek vloaz, e chom
nebeut a spi, ret mat anzav...
e chom nebeut a spi.

Ar c'heneil. Ne ouzer morse ! Kontet e vez
traoù souezhusoc'h c'hoazh.
Bep mintin e vez lennet
war ar gazetenn.
Lakaomp e vefe e-unan-penn
war un enezenn hag en defe fiziet

e lizher en ur voutailh...
 've ket da souezhiñ
 e vefe chomet en donvor.

Ar wreg. Evel just, kanaouennoù ar vartoloded
 a zo leun a gontadennoù evel-se
 E gwirionez, ne vez morse an traoù evel-se
 nemet ur wech etre mil.

Ar c'heneil. 'Pezh a zo sur, ez eus un dra a c'hoarvez
 ur wech etre mil ha koulskoude
 e c'hoarvez, istor ho fealded
 an hini eo !
 Tremena ra tud, ken na ra.
 O c'hortoz emaooc'h atav.

Ar wreg. Me am befe laeret, lazhet evitañ
 Me am befe laeret, lazhet evitañ
 Ar wazed all a zisplij din,
 setu n'em eus poan ebet
 o vevañ dereat.

Ar c'heneil. Ret mat eo deoc'h anzav memestra
 na c'hoarvez ket alies, en hor straed ?

Ar wreg. Ma vefe du-mañ, e c'hell bezañ
 e toganfen anezhañ ... ne ouzon ket.
 Met keit ha ma vo e luc'hskeudenn
 a-us d'ar gwele, ha keit ha na vo ket
 eñ e-barzh,
 Keit ha ma vo e skeudenn
 en e lec'h a-us d'ar gwele
 em befe poan-galon o ober.

An tad-kaer o tont en ti.
 Atav memes rardonenn.
 Ma c'hellfes bezañ hegarat
 e vefe gwelloc'h ar stal ganeomp

Ar c'heneil. Fuloriñ a ra ganeoc'h.

An tad-kaer. Ur gwaz a c'hellfe kavout
 evit bezañ e penn an davarn
 ha reiñ lañs dezhi en-dro.

Ar c'heneil. Dimezi ganti am eus kinniget,
 Degemeret mat on bet.

Ar wreg. Ni, bezañ o vevañ a-gevret, ne soñjit ket !
 Un deiz e sko unan bennak ouzh an nor,
 Piv eo ? Piv eo ?
 Un deiz e sko unan bennak ouzh an nor,
 Piv eo ? Va gwaz an hini eo.

An tad-kaer. E strad ar mor emañ da waz
 pe debret eo bet gant ar vorianed.

Ar wreg. Un deiz e teuio va gwaz en-dro
 ur marmouz war e skoaz
 ha ken pinvidik, ken pinvidik,
 Ma c'hellimp prenañ
 Kafe ar C'hoñvers e kreiz-kêr.

Ar c'heneil. Bamet e choman ganeoc'h.

An tad-kaer. Peadra 'zo
 N'hon eus ket mui ur gwenneg toull. Ar bar
 a ya da atredoù. Gwelloc'h e vefe deomp
 chom hep ober netra

Ar c'heneil. Ha ma tufe en-dro,
 goullo e chakodoù ?

Ar wreg. Neuze, neuze
 n'eus torfed ebet
 am befe aon d'ober
 evit e c'holeiñ gant aour.

An tad-kaer. Va merc'h n'eo nemet ur c'hoarierez sinema.

Ar c'heneil. D'an holl wazed
e hetan kaout ur wreg
eus ar seurt-se.
Noz vat. Mont a ran d'ar gêr.

An tad-kaer. D'al lun e vez sioul hor straed
Gant da win emañ kousket an dud.

Ar c'heneil. Gant va gwin pe ho hini, c'hwi 'oar !
N'eo ket gwelloc'h va stal ganin
eget n'emañ gant ar re all.
Noz vat. Met, disoñjal a raen,
Deut e oan da amprestañ ho morzhol diganeoc'h
N'ho peus ket ezhomm ?

Ar wreg. Kemerit.

Ar c'heneil. Trugarez.

Ar wreg. Ken arc'hoazh.
(Hag eñ da vont er-maez eus ar rannidi, da dreuziñ
al leurenn ha da vont e-barzh e rann, a-zehou.
Ne vez ket mui gwelet goude bezañ bet renket
an traoù un tammig e-barzh e di.)

Ar wreg. Nag ur paotr mat eo !

An tad-kaer. Da garout a ra !
Te a rankfe dimeziñ gantañ.

Ar wreg. Tad, tad, araok dimeziñ e rankan
dont da vezañ intañvez.
Goustadik, va zad, ret mat din da gentañ
dont da vezañ intañvez.

An tad-kaer. Sot-pitilh eo bezañ aheurtet evel-se
Goude bezañ bet mut e-pad pemzek vloaz
Pemzek vloaz ! Pemp bloaz warn-ugent e oas
Ha daou-ugent bremañ. Daou-ugent !

N'eo ket anat tout ar bloavezhioù-se
warnout 'vel just
met an oad-se a gont
evit ur vaouez.

Ar wreg. Dont a raio en-dro.
(E-pad ar pennadig da heul e vez gwelet penn ar
martolod er foñs. Pignat a ra gant an diri.
E gorf a-bezh a vez gwelet. Un nebeut kammedoù
a ra er straed).

Pemp bloaz ha daou-ugent e vo
Ne ra foutre-kaer gant va oad,
Va c'harout a ra, eñ a zigoro an nor
en ur c'harmiñ : Me eo ! Me eo !


(Chom a ra ar martolod a-sav dirak an nor, etre
daou venoz emañ. Treiñ a ra kein ha mont betek
an nor a-dal dezhañ).

An tad-kaer. Gant ar merc'hed n'eus netra da lavarout !
(En ur vont kuit ganti dre foñs ar sal) :

Setu ur voest, a c'heller lavarout, etrezomp,
a c'houzañver a bep seurt enni
Hag e komzez evel ur plac'hig
o vont d'ober he fask kentañ.

(An noz a-gleiz hag a-zehou. N'eus nemet ar
straed o vezañ sklerijennet gant al loar.)

Ar martolod, e-unan.
Bihan-meurbet eo hor straed
Ken bras all e oa din e-pad ma oan o veajiñ :
Sammet e oan ganti. Alies
ne ouien ket mui petra ober
evit he c'has ganin.
Disneuziet e vez ho tremm gant an avelioù.



Unan all a vez graet deoc'h
Gant ar skuizhder hag an heol. N'eus den
er vro en defe va anavezet.
Keloù am eus goulennet zoken :
Feal eo va gwreg.
Ha ma ne anavezfe ket ac'hanon ?
Greomp un taol-esa da gentañ
gant ur c'heneil.

(Dont a ra tre - a-zehou - en ur hopal.)

Hep !

(E geneil a zeu, ul letern gentañ en e zorn.)

Ar c'heneil. Gwall-vezv sur ez oc'h
evit dihuniñ an dud a zo kousket
en eur-mañ 'n noz.

Ar martolod. Sav da letern
Sav da letern
Ha sell ouzhin.

Ar c'heneil. Mezverien a-walc'h a welan
Er-maez !

Ar martolod. Sell ouzhin.

Ar c'heneil (o sellout outañ)
Ma ne skarzhit ket kuit diouzhtu
ez an da c'houlenn sikour. Hag
ouzh tud ar bolis e sentoc'h.

Ar martolod. Lak da zorn war va c'halon

Ar c'heneil. Ur gouli ?
Gwashañ 'zo. Fellout a ra deoc'h
kas un tiegezh dereat da goll.

Ar martolod (o leñvañ)
Ken cheñchet-se on neuze, ken cheñchet-se.

Ar c'heneil. Ne fell ket din degemer mezverien
e-doug an noz.

(Bountañ a ra anezhañ er-maez.)

Ar martolod. N'anavezez ket ac'hanon !
N'anavezez ket ac'hanon !

Ar c'heneil. Kit kuit !

Ar martolod. Aon am eus.

Ar c'heneil. Ur mestaol ho peus graet,
sur a-walc'h, bez' eus klask war ho lerc'h
hag e fell deoc'h kuzhat.

Ar martolod. Den kuzhetoc'h egedon n'eus ket
war an douar-mañ. Er c'hontrol e fell din
mont er-maez eus va zoull.

Ar c'heneil. Hastit buan !

Ar martolod. Ha ma 'z eo stlaket
dor ma zi e-kreiz ma fas gant ma gwreg
Gant ma gwreg
ma ve stlaket dor va zi
ouzhin e-kreiz ma fas !

Ar c'heneil. Penaos ?

Ar martolod. Lavarout a ran mat : Ma 'z on taolet
e-maez eus ma zi gant va gwreg

Ar c'heneil. O !

Ar martolod. Va anavezout a rez

Ar c'heneil. Te ! Te eo !

Ar martolod. Ne gredez ket ?
Dont a ran da gompren em eus graet mat
o chom hep dont e-barzh an ti all,
war-eeun.

Ar c'heneil. Ha posubl eo ? Posubl eo ?

Ar martolod (o pokat dezhañ)
Arabat bezañ nec'het. N'eo ket da fazi
E bro ar vorianed e vezit kizellet
gant ar gontell, evel un tamm koad.
Beuzet on ; losket on ;
debret on. Gant ar vuhez-se
e cheñcher.

Ha va gwreg ?

Ar c'heneil. Heñvel.
Koulz lavarout : emañ en he c'hoañvez ouzh
da c'hortoz. N'o deus ket mui ur gweneg
toull war o anv,
Hi hag he zad.

Ar martolod. Gwell a-se
Peadra am eus em chakod
da c'holeiñ anezho gant aour.

Ar c'heneil. Te ! Te eo ! Ne seblantez ket bezañ koshaet
cheñchet out, n'eus nemet-se.
Ha pinvidik !

Ar martolod. Evel en ur gontadenn
eus an nozvezhioù arabiatic.

Ar c'heneil. D'ar red ez an da lavarout !...

Ar martolod. N'ez ket. Cheñch a ran menoz.
En da di emañ o vont da gousket
Arabat komz eus va distro, da zen ebet.
E-kichen va gwreg e fell din bevañ
Hep ma ouife tra.
Poan hon eus e gwirionez da goll
Boaz ar planedennoù dianavez
An hini ziwezhañ e vo honnezh
Hag an hini gaerañ.

Da c'her a roez din !

Ar c'heneil. Hag e ran ! Da chafis a weli
Te, da-unan.

Ar martolod. Kuzh ac'hanon. Mont a rin d'o zi
Warc'hoazh da noz da c'houlenn plas
da gousket.
Ma anavezont ac'hanon, gwazh a se,
A-hend-all e c'hoariin
evit gwelout va eurusted eus an diavaez.

LIEN

EIL ARVEST

(E-barzh ar rann dehou, ar martolod hag e geneil.
Ar martolod war-nes mont er-maez.)

Ar c'heneil. Chafis vat.

Ar martolod. Lamm a ra va c'halon
gwashoc'h eget pa vefen o vont d'ar groug.
Dec'h da noz em eus bet aon en da di.
Aon am eus c'hoazh.

Ar c'heneil. Dall e teuer da vezañ
gant ar boaz, hi a zo boaz
ouzh da c'hortoz, met daoulagad lemm
a vez d'ar merc'hed.

(Treuziñ a ra ar martolod ar straed ha skeiñ ouzh
an nor. E wreg a zigor dezhañ.)

Ar wreg. Deuit tre.

Ar martolod. Dont a ran, dont a ran itron
Da zegas keloù deoc'h.

Ar wreg. Keloù eus va gwaz ?

Ar martolod. Eus ho kwaz,
E gwirionez, keloù,
itron, eus ho kwaz.

Ar wreg. Marv eo.

Ar martolod. N'eo ket, itron, bev eo.
E welet em eus, teir sizhun 'zo bremañ.

Ar wreg. Buan, buan, azezit
Komzit, foll e teuan da vezañ...
Pelec'h emañ o vevañ ?

Ar martolod. Ur c'hevrin eo
Dezhañ e vo da lavarout deoc'h.

Ar wreg. Dont a raio !

Ar martolod. 'mañ o tont, war an hent emañ
Moarvat e vo erru
ar sizhun a zeu.

Ar wreg. Ma Doue ! Ha yac'h eo ?

Ar martolod. Ya itron, yac'h eo, yac'h pesk zoken

Ar wreg. Komzit din diwar e benn. Selaou a ran.

Ar martolod. Paour-razh eo.

Ar wreg. Ha laouen eo ?

Ar martolod. Paour-tre eo, paour-meurbet !!!
Peadra da vevañ am eus prestet dezhañ.

Ar wreg. O ! trugarez, trugarez, aotrou.

Ar martolod. Pinvidik e tlee dont en-dro.

Ar wreg. Gant ma teuo en-dro, n'eus nemet-se a gont.

Ar martolod. 'vel just. Met kalz dleoù en deus
emeur o klask war e lerc'h. Kuzhat a ra.
Setu perak
ne veaj ket mui e-pad an deiz.

Ar wreg. Dleoù !

Ar martolod. Paeañ a reoc'h evitañ.
Hag e vo dieub.

Ar wreg. Met n'hon eus ket mui ur gwenneg toull
Goullo eo ar c'hef.

(An tad-kaer a zeu tre.)

Ar martolod. Arc'hant a gavoc'h
Ur vaouez ne vez ket diaes dezhi
Kavout pa vez koant.

An tad-kaer. Gwelout a rez !

Ar wreg. Ma gwaz karet, ma gwaz karet,
O tont en-dro, peseurt tefzor
a dalvez ho tistro ?

An tad-kaer. Ne selaou ket mui
pezh a gontit.
Sot eo gant ar genaoueg-se.
Da ober e fortun e oa aet kuit,
petra a zo c'hoarvezet gantañ ?

Ar martolod. Ar chañs a oa gantañ
rak Rouanez an Amerik
a oa e karantez gantañ.

Ar wreg. Ur sovajez !

Ar martolod. Ur sovajez a dalveze gwelloc'h
eget bezañ debret, eget bezañ losket ez-vev.

An tad-kaer. Neuze...

Ar martolod. Nac'h a ra ar paotr,
skampañ kuit, ha plantañ ac'hanon aze.

Ar wreg. Eñ !

Ar martolod. Pa oant o prientiñ va aberzh
edo ar rouanez o klask frealz
ganin-me.
Sellit penaos e tro an traoù.
Me a lavar dezhi, Itron Rouanez,
E soñj anezhañ, roit din
ho perlez, ho perlez
e soñj anezhañ, roit din
ho perlez...

(Ar perlez a denn eus e chakod.)

setu.
Ur fortun a dalvezont.

Ar wreg. Ha va gwaz ?

Ar martolod. Adkavet em eus anezhañ
brevet gant ar skuizhder hag an naon,
un nebeut kilometradoù ac'han.

An tad-kaer. Pebezh genaoueg !

Ar wreg. Ma gwaz karet !

Ar martolod. Touellañ e wreg
ha saveteiñ e vuhez
a zo daou dra disheñvel.
Displijout a rafe deoc'h
e teufe en-dro
Gant ar perlez ?
C'hwi 'oar e rofe ker Roue Bro-Spagn
evit o c'haout.

Ar wreg. Paour e karan anezhañ. Pinvidik e vefe
Ma vefe bet mennet da douellañ ac'hanon.

Ar martolod. Plac'h lorc'hus ez oc'h.
Kuzhat a ran an teñzor. Warc'hoazh
eo ret din mont da glask war-lerc'h
ur yuzev evit prizachañ ar perlez.
Amañ n'anavezan den ebet
den, den ebet,
Amañ ne vefen sioul
nemet en ho ti e chomfen.
Ar gwir am eus da gousket
war al leur ?

Ar wreg. Keloù eus va gwaz
ho peus degaset din,
Martolod, en ho ti emac'h.
Kemerit ar pallenn-se
Ar goubenner hag ar blueg-treid.

Ar martolod. Deus kreiz ho kalon e teu. Ma, asantiñ a ran.
Penzektez kerzhed am eus en va divesker
Brevet on gant ar c'hoant kousket.

Ar c'heneil, (en e ranndi)
War a seblant e tro ar c'hoari da vat
Me ' garfe gwelout.
A !

(Ar morzhol a gemer. Treuziñ a ra ar straed hag
eñ da skeiñ ouzh an dor a-dal.)

Ar wreg. Piv eo ?

Ar c'heneil. Me.

An tad-kaer. Me ' zo o vont da zigeriñ.

(d'ar martolod)

Ar wreg. Ur c'heneil eo
Ur c'heneil d'am gwaz.

(Digeriñ a ra)

Ar c'heneil. Digarezit ma tirenkan ac'hanoc'h,
Ar morzhol am boa disañjet.

Ar wreg. Trugarez. Ne dalveze ket ar boan.

Ar c'heneil. Tud 'zo en ho ti ?

Ar wreg. Ur martolod
hep ostaleri ebet hag a vez roet
herberc'h dezhañ gant va zad.

Ar c'heneil. Petra a gont ?

Ar wreg. Q... Brevet eo
gant ar skuizhder. Noz vat.

Ar c'heneil. Noz vat.

Ar wreg. Dezhañ e vo da vezañ sebezet.
Setu. Morailhañ a ran an nor.

(E-pad m'emañ ar martolod o vont da gousket
emañ-hi o pellaat ; treiñ a ra kein en ur vont
kuit hag e lavar :)

Iskis eo, en deñvalijenn evel-se,
ez oc'h heñvel un tammig ouzh va gwaz.

LIEN

TREDE ARVEST

(Ranndi gleiz, a-vec'h sklerijennet - straed gant loar - rann dehou du-holl. Kousket eo ar gwaz, gourvezet war e gof, e zremm kuzhet e pleg e vrec'h. Menel a ra goulllo ar rann, neuze e vez gwelet ar wreg o tont, goustadik, eus ur gambr en traoñ, ur voujienn ganti. Lakaat a ra ar voujienn war an daol, hag hi da dostaat ouzh ar martolod, o sellout outañ. Kemer a ra ar morzhol, e sevel a ra. Ne gred ket. Pasaat 'ra. Difiñv e chom. Skeiñ a ra war e benn. E vrec'h a astenn. Sevel a ra hag e kouezh da vat. Un eil taol a sko. Furchal a ra evit kemer ar perlez. Trouz ar morzhol o kouezhañ adarre. Dont a ra an tad-kaer.)

An tad-kaer. Piv 'zo aze ?

Ar wreg. Peoc'h, peoc'h.
Deus tostoc'h.

An tad-kaer. Te ! Petra emañ oc'h ober ?

Ar wreg. N'em eus mui netra d'ober.
Graet eo.

An tad-kaer. Kousket eo.

Ar wreg. Nann, va zad.
N'emañ ket mui kousket. E lazhet em eus.

An tad-kaer. Lazhet, paour kaezh !
Echu eo ganeomp.

Ar wreg. Ma c'harmez.
Piv a ouio a-hend-all ?
N'eo anavezet gant den.

An tad-kaer. Met petra lavarout ? Petra lavarout en ti all ?

Ar wreg. Lavarout a rin e oa da vont kuit da darzh an deiz.

(Emañ an deiz o sevel.)

An tad-kaer. Penaos ec'h eus graet ?

Ar wreg. Ar morzhol !

Gant ar morzhol em eus skoet,
Skoet em eus kreñv war ar penn,
Skoet em eus a-lazh va c'horf,
Ne oan ket evit kousket.
Va gwaz am eus gwelet war an hent,
E-unan, hep tamm arc'hant,
Neuze em eus graet va soñj.
A! spontus eo gwelout e gein
Heñvel eo an holl vartoloded pa
seller ouzh o c'hein.

An tad-kaer. Petra a vo graet gant ar c'horf ?

Ar wreg. Ret eo bezañ kalonek
evit e sevel, e zougen
hag e stlepel e-barzh ar puñs.

An tad-kaer. Ponner eo, ponner-tre eo.

Ar wreg. Ret eo bezañ kalonek
Bremañ ma'z out pinvidik ha va gwaz
a zo paet e zle evitañ.

An tad-kaer. Me 'zo kozh ha te 'zo maouez
Ha gouest e vimp d'e zougen ?

Ar wreg. Ret mat eo hag e-barzh ar puñs
e stlepel va zad, va zad...
ret mat eo hag e-barzh ar puñs
va zad, e stlepel.

(Klask a reont e zougen.)

An tad-kaer. Ur gouriz en deus, sur a-walc'h
leun a aour - tenn anezhañ kuit...
Ouzh e viz en deus ur walenn,
tenn anezhi kuit, tenn anezhi kuit.

Ar wreg. Arabat, ur walenn eured eo,
dimezet e oa !

An tad-kaer. Re ziwzhat eo evit kaout truez outañ.
Hastomp buan, krog eo ar c'hilheien
da ganañ.

Ar wreg. Tarzh an deiz eo. Aon am eus, va zad,
Me' grede din e oamp e-kreiz an noz.

(E-barzh e ranndi e vez gwelet ar c'heneil
gant ul letern.)

Ar c'heneil. Me 'zo ' vont da welout anezhañ hep
gouzout dezho.

(Treuziñ a ra ar straed.)

An tad-kaer. Unan bennak a zo o tont.

Ar c'heneil. Me eo.

Ar wreg. Tavomp.
Kousket eo. Kousket mat a ranker ober
goude bezañ graet tro ar bed.

(Mont a ra en-dro d'e di.)

An tad-kaer. Pellast a ra. Petra a zeus
da glask en eur-mañ ?

Ar wreg. Deomp va zad. Krogomp ennañ.
C'hwi dre an treid, me dre an divskoaz.

An tad-kaer. Na ponner eo !

Ar wreg. Goustadik, goustadik.
Ret eo e zougen, va zad
C'hwi dre an treid, me dre an divskoaz
Evit saveteiñ va gwaz.

(E zougen a reont.)

LIEN

AL LANV

Koumanant : 30 lur (50 lur evit skoazellañ)

AL LANV 7 rue du Recteur P Henry
35000 Rennes - Villejean

KELEIER ... TRESADENNOU ... SKEUDENNOU ...
AN DARVOUDOU E BREIZH HAG ER BED ...
STOURM AR POBLOU BIHAN ... SONEREZH NEVEZ ...
GERIOU KROAZ ... PENNADOU-KAOZ ...

WANIG ha WENIG

Koumanant : 40 lur

CCP Roudaut 2943-5I Rennes

Sekretourva : M.L. FAVE , Kernevez
29250 KASTELL-PAOL
SAINT POL DE LEON

